

M. Lodon / i approuver par
GENOVEFA HA BENONI
M. Levisque
PEDIT DOUE EVIDOMP-NY.

4.5.4.

n. 2090



bp

Ma c'hellimp oll mont un devea

D'o cavet etouez an selez.



B U E Z

SANTEZ GENOVEFA

A VRABANT.

Var an ton ordinal.



ME o supli, compagnunez,
Da glêvet cana eur vuez,
Da Genovefa e zeo grêt,
Melezour d'an itronezet,



A Vrabant e voa ginidic,
A lignez nobl ha pinvidic;
Christenien vad e voant ive,
Guir zervicherien da Zoue.



Pa voa en he bugaleach,
Hi a gare an ermitach;

En eur c'horn a jardin e zad,
Nemet eno n'em gaf ervad.



He mam ous e c'honsideri;
Eun deiz a c'houlennas outhi:
Penos, va merc'hic ermites,
Ha ne deuet-hu qen d'ar pales?



Va mam, e cornic ho jardin
Me am eus eur boqet divin;
Me'm eus eno eur melezour,
An aotrou sant Yan Badezour.



Allas! va merc'hic, emezi,
C'houi n'en doc'h qet evit souffri;
Ebars en dezert ez eus poan
Ne andurac'h qet, a gredan.]



Caëroc'h evit fourdelizen
E voa'r plac'h-màn a dra certen;
Qen a deuet da vit e fortret,
Da gas d'an noblanç da velet.



Eur palatin Sifroi hanvet,
He renome en deus clêvet,
Hag a zisqennas e Brabant,

4

Gant eun equipach excelant,



Ractal vel ma voe erruet,
E ty e zad en em rentet,
En em brezantas er pales,
Saludi'r prinç hag ar brinces.



Goude o beza saludet,
E mennat en deus goulennet,
Ma velje ar brinces yaouanq
Qent evit monet a Vrabant.



He zad dont da gonsideri
E voa avantajus ar parti,
A roas carg d'he mam neuze
Da c'hout hag hi a zemeje.



Va merc'h, prest en em breparet,
Erru zo eur prinç d'o quelet;
Eur palatin a goad huel,
Qender-gompes d'an impalaer.



Me ne meus nemet seitec hoas,
Ha dre ze ouñ re yaouanq c'hoas;
N'en d'ouñ c'hoas nemet eur bugel
Da vont e suit eun impalaer.



Evel an eol pe ar c'hristal,
 Ec'h antreas ebars er zal:
 Ar palatin zo estonet,
 Ho consideri he genet.



Gant honor ha perseveranç,
 E eure dezan ar reveranç,
 He furnez hag he modesti,
 A voa meurbet d'e fantazi.



Mæs pa voe parlantet dezi,
 Var ar sujet a dimezi,
 E chenche a liou e bizach,
 Ar palatin er remerqas.



Ne ouffe den consideri
 Pegement a velancoli
 A gonserve ar palatin,
 Gant aon caout zefus diout-hi.



Eur mis antier e zeo paded
 Solemniteou an eured,
 Ar zonerrien, ar bal, an dans,
 Vizitou bemdez gant noblanç.

6

*

Sifroi, c'houi oc'h eus eureujet
Ar gaëra demeus ar merc'het,
Evit monet geneoc'h d'ho ty,
Dioüallit ne deffe anui.

*

Birviqen anui ne devo,
Evit qeit a ma vezin beo.
Ne qet evit cavet anui
E goulennàn da zont d'am zy.

*

Sifroi o veza preparet
Da vont da Treves gant e bried;
E voe gant e zad recevet
Gant cals a joa hag a respet.

*

Daou vloavez antier ez int bet
Hep beza gant netra tourmantet;
Bras e voa ar fidelite
A voa entre'n daou briede.

*

Qen a deuas Abderame,
Eun adversour bras d'ar roue,
Da brometi a dra certen,
Massacri an oll gristenien.



Biscoas distruch a zoudarded
 Évit eur vech ne voe goelet;
 Adal Sodom ha Bethsabe
 Bete Tour e pad e arme.



Tri-ugent mil a zoudarded,
 Ha daouzec-mil a zragonet
 A voa gant Martel dirac Tour;
 Ha c'hoas e c'houlenne sicour.



Scrifa a eure d'an noblanç
 A Alamagn, a Spagn, a Franc;
 Dont d'asista Charles Martel,
 A voa jeneral er brezel.



Sifroi, unan ar re vrassa;
 A varche ive da genta,
 Hag e voe dezàn disrifet
 Monet gant an alamagnet.



Sifroi al lizer pa velas,
 Genovefa a gonfias,
 E diegez, e oll vadou,
 D'e gonfidant hanvet Golo:



Neuze pa voe prest e arme ;
 E partias en han' Doue ,
 Hag e voe gant Martel recevet
 Gant cals a joa hag a respet.



A drugarez an Eternel ,
 E deut ar victor gant Martel :
 Abderame zo bet lazet
 En Tour, hag e oll zoudardet.



Pa voe achu ar gombat-mâ ;
 Da velet e Genovefa
 En deveus digasset Sifroi
 E zijëntil hanvet Lanfroi.



Itron , setu amàn qêlou ;
 Lizerou digant an aotrou ;
 Er paqat e zeus eur prezant
 A dal eur som bras a arc'hant.



Lavarat a ras d'an itron
 E zê'n aotrou da Avignon
 Ha da Narbon vit qemeret
 Roue bras ar sarazinet.



Evel ma clêvas gemense;
 E zê c'hoas he goas d'an arme;
 E scrifas buan die Lanfroi
 Eul lizer guell drist da Sifroi.



C'houi, Sifroi, a zo en arme
 En danger bras eus ho pue;
 Mas ho Genoyefa a zo
 En qer bras danger gant Golo.



Penevert n'em eus qet a c'hoant
 Prononci comzou insolant,
 Me lavarfe ar propoziou
 A gleo an itron gant Golo.



Golo a voa eun intendant
 A voa bemde comunamant
 E compagnunez an itron,
 En despet d'e ompinion.



Tol evez, papillon bian;
 Rac na vez losqet gant an tan;
 An tan eus an impurete,
 A zo e calon nos ha de,



Ma sonches en devotion,
 Hac en modesti an itron,
 Ne laqeses qet da speret
 Da garet nep na qaro qet.



Pa vel erfat ar mechant-màn
 N'el qet deceo ar brintes màn,
 Ar soupçon en deveus sonjet
 Laqat en calon he fried.



Ama eo guelet an impi
 O comanç c'hoari e drajedi;
 Ember e velot, christenien,
 E draitourachou pen-da-ben.



Eur c'heginer a voa en ty
 A bel a voa o servichi,
 Hennes a gare an itron,
 Balamour ma voa den guirion.



Rei a eure an întandant
 D'ar c'heginer commandamant
 Mont d'e c'hambri pa vize cousqet,
 Hac én laqat o c'homeret.



Caër o d'oa'n daou inoçant-se,
 Goulen an douar hag an eê
 Da zobet eno da destou
 Eus a draitourezou Golo.



Allas! allas! ous ar jibet,
 Mervel, paour-qêz, a vezo ret:
 Ny a rai pinijen hon daou
 Eus a draitourezou Golo.



Qemeret voe ar c'heginer,
 Hac en laqueat prizonier:
 Genovefa a voe laquet
 Ebars en eur gambr alc'huezet:
 Eno e combatê ounte,
 Abalamour d'ar chastete.



Scrifa ra Golo lizerou,
 Ha cass messenger d'an aotrou;
 Da lavaret voa decevet
 Gant ar c'heginer e bried.



Scrifa a eure an aotrou
 Da laquat Drogan d'ar maro;
 Laquat Genovefa ive

Er prison qen na aruje.



Pa voe bet pemp mis er prizon,
 Neuze e vouïlloudas an itron,
 Hep sicour, na goulou, na tan,
 Hy a c'hanas eur mab bian.



Incontinent ma voe ganet,
 E gristen e deveus grêt,
 Gant aon na varvje diganti,
 Hag en e hanvas Benoni.



Sevel eure Golo ar brud,
 Comunamant e mesq an dud
 Penos Sifroi a voa beuzet,
 O sonjal caouet e bried.



Cass a eure e vagerez
 Da c'houlen digant ar brinces
 Ma carje dont d'e eureuji,
 E roje liberte dezi.



Ar zantez a voa qelennet
 Gant ar rouanes eus ar bed;
 Ebars er gambr pa antreat,
 Eur façad dezan a roas,

Hennes eo sur al lealdet
A poa da Sifroi prometet.



Ma vijes fidel, emezi,
Pa voas laqêt da vestr em zy,
Te a vije recompanset
Pa vije aru va fried.



Aruout a ra lizerou,
E tistro d'ar gær an aotrou;
Pa gleo Golo e teu ar c'hont,
E c'ha da Strasbourg d'e rancont.



Mont a ra da dy eur sorcerez,
Hag a voa c'hoar d'e vagerez,
Ha rei dezi zour hag arc'hant,
Qement qe na vije couant,



M'em eus eur melezour ardant,
Eme ar sorcerez mechant,
Hag a rai da Sifroi guelet
Ar pezh ne d'e qet c'hoarvezet.



Pa voe sur demeus e affer,
E ras joüis ebars en kær,
Ma voe gant ar c'hont recevet
Gant cals a joa hag a respet.



Neuze en tennas a goste,
 Da c'hout ountàn ar virione
 Var ar sujet eus e bried,
 A ra e galon contristet.



Golo a lavaras dezàn,
 Na douetit qet, emezàn,
 Demeus e infidelite
 A zo prejudiç d'ho pue.



Ouspen, eme an den mechant,
 Me anavez eur vreg vaillant
 A zisquelo en ho prezanç
 Qement zo grêt en oc'h absanç.



Sifroi neuze ouz e glêvet,
 A zo contantet e speret
 Evel darn eus ar gristenien
 O tont da gredi sorcerien.



Monet a rejont assambles
 O daou da gaout ar sorcerez,
 En un toul dindan an douar,
 E léc'h ne voa n'ag eol na loar,



Ar sorcerez a alumas

Diou c'houlaouen gaër a goar glas ;
 Leis eur bezel demeus a zour ,
 Laqat ennan eur melezour ,
 E ra dezàn teir guech guelet
 Ar c'heginer gant e bried.



Neuze ec'h ordren da Golo
 Da vont d'he laqat d'ar maro ,
 Hy hag he mabig Benoni :
 Ro dê ar maro a giri.



Golo sur demeus e affer ,
 A retornas joaüs d'ar gær ,
 A lavaras d'e vagerez :
 Grêt ar vech-mâ eus ar brinccs



Roet he zetanc gant e fried ,
 Evit ma vezo distrojet
 Hy hag he mabig Benoni ,
 A varvo sur em fantazi.



Eur plac'h yaouanq a voa en ty
 Eur verc'h dezi o servichi ,
 Touchet eus a gompasion ,
 A yas da gavet an itron.



Allas ! emezi , ya mestrez ,

Grêt ar vech-ma eus ho puez!
 Deut ê ar setanç gant Golo,
 Evit ho laqât d'ar maro.

*

Leveret din, va mignonez,
 Petra vo grêt d'am bugel qez.
 Allas! va mestrez, emezi,
 Mervel a rai qercouls ha c'houi.

*

Va mignonez, m'ar am c'heret,
 Grit eur blijadur em reqet:
 Digassit din liou ha paper,
 Evit ma scrifin eul lizer.

*

Evit ma scrifin eur biliet,
 Da laret adieu d'am pried;
 Pa vezo Golo o coania,
 C'houi ailo donet da vinta,
 Hag e deuler em c'habinet,
 Eur c'houlz benag e vo cavet.

*

Adieu, emezi, va fried,
 Me ya d'ar maro en ho reqet;
 Biscoas n'em eus grêt rezistanç
 Da souffri d'oc'h obeissanç.

*

Rei a eure an intendant

Da zaou vevel commandamant
 En eur c'hoad monet d'o laza,
 Ha da zigas e zeod deza.



Sevel a eure qent an de,
 Ha cass gantâ an daou zen-se:
 Pa voent aruet er prizon,
 E voe divisqet an iiron,
 E rojont dezi var e zro
 Eur gos vantellic d'e golo.



Pa voant aru ebars er plaç,
 Unan a den e gontel noas
 Evit laza he Benoni,
 Voa etre e divree'h ganti.



Ne doa lavaret ger ebet,
 Neuze e commanças prezeg;
 E za d'an daoulin diraze,
 D'o zuplia, en han' Doue,
 He laza qent evit he bugel,
 Ne rancje qet diou vech mervel.



An daou zervicher gant truez,
 A lêzas gante o buez;
 Ha goude o zrugarecât,
 Ec'h antreas don en eur c'hoad.



En eur rivier a dremenas ;
 Diamant Sifroi a dolas ,
 Da redec gant an dour coulant ;
 Pa voa caos demeus he zourmant.



Evit, emezi, n'am bo qet
 E nep façon poan da velet
 Ar metq-se eus hon union,
 Epad hor separation.



An diou nos genta e zê bet
 Dindan an derven o cousqet,
 Hep souffri na poan nag anui,
 Nemet damant d'he Benoni.



Eun druez bras voa e c'hlêvet,
 Pa en em zantas dilêzet ;
 Allas ! emezi, va bugel,
 Er vech-mâ e ranqi mervel.



Guerc'hez Vari, petra a rin ;
 Ne zeus mui a læz em peutrin ;
 Ne deu gantàn nemet ar goad ,
 Ne gev mui ur strill a læz mad.



O ya Doue oll-buissant ,

O pet soign eus eun inoçant;
 Roit dezàn ar man da zibri,
 Vel a roit d'ar marvrini.



Neuze e tisqen ar Verc'hez
 Er c'hoad da gavet ar zantez,
 Da zigas dezi un heizez,
 A voe d'ar bugel magerez.



Qemerit ho mabig christen,
 Da deut da gichen ar feunteun,
 Metu amàn d'èc'h un heizez,
 A vezo dezàn magerez.



Ar bleizi, al loënet mechant
 A voe dezi obeissant;
 Bemde e teuent d'e adori,
 A da renta bizit dezi.



Er c'hoad e voa eur porc'hel goue,
 A zeue d'e guelet bemde,
 A duriat an douar dezi,
 A gaouet qeler da zibri.



Pa voa an daou vloas tremenet,
 A nel a zo deut d'e guelet,

Hag a ro dei eur groas arc'hant
Hag eur grucifi olifant.



Courach, va merc'h, na squizit qe
Eur vech e viot delivret :
Preparet zo eur gurunen
A yêlo eun deiz var ho pen.



Pa voa ar pemp bloas tremene
Da ouela eo en em leqêt
Var he daoulin dirag ar groas,
Evel-hen outi e comzas :



Penos, emezi, va Doue,
Hag er c'his-mâ e chomin-me?
Ha ne d'ê qet avoalc'h pemp bloas
Da veza bet er poaniou bras?



P'am be tanet oc'h ilizou,
Pe ranverset oc'h oteriou,
Em bije ho coler apezet
Gant an daëlou am eus squillet.



Petra, va Doue, am eus grêt
Da veza crenn abandonet?
Dija em eus ancounac'het

et

An uzach am boa da brezec ;
Mas muia tra a gresq va foan,
zeo va bugelig bian.

*

Ar grucifi dre viract bras
vel-hen outi a gomzas :
Ha me, va merc'h, petra meus grêt
Da veza en eur groas staget ?

*

Guir, ê ho mab a gresq ho poanq
Va hini ne de get bian,
Gueler va Mam, Yan, Madalen,
Jannet o c'halon em c'hichen.

*

Setu ar zantez consolet
Gant ar voez a Zalver ar bed ;
Ne c'houlén mui nemet poaniou,
Hag ar c'hruella tourmanchou,

*

Pa voa eun devez an aotrou
O sellet ous e baperiou,
Ec'h aruas gant ar billet
En devoa scifet e bried.

*

Ne ouffe den consideri
c'hlac'har, e velancoli ;

Tost e voe d'e galon ranna,
Pa lennas an tam paper-mâ,



Sifroi n'en deus mui a repos;
Ne ell cousquet na deiz na nos,
Gant eur voez a lavar dezàn:
Te zo eun den ar c'hruellàn;
Te c'heus lazet da vap ena,
Ha Drogan ha Genovefa.



En em laqat a ras expres
Da vont d'ar chasse eun devez,
Ha ma rancontras eun heizes
En rentas e coad ar gontes.



Er c'havarn eo en em dec'het,
Adrén qein ar zantez cuzet;
Sifroi a voe estonet bras
Form eur femelen pa velas.



Pa velas form eur femelen,
Hag eun eizes en e c'hichen,
Eur voez a lavaras dezàn:
Sifroi, Genovefa houmàn.



Petra oc'h aze er gis-se,

Er form-ze gant al loënet goue ?
 Me zo eur vreg eus a Vrabant,
 A zo seiz vloas zo en tourmant;
 A zo seiz vloas zo retiret,
 Gant aon rac coler va fried.



Greg a Vrabant, din leveret,
 Ac'hanoc'h-hu pe hano a ret ?
 Genovefa e voan hanvet,
 Eur palatin voa va fried.



Cris vije'r galon na ouelje,
 Tost d'ar c'havarn neb a vije,
 Guelet ar prinç hag ar brinces
 Ha semplet o daou assambles.



Ha pa voent o daou dizemplet,
 Ar prinç goulen dious e bried
 Pelêc'h ema ar c'hrouadur
 En deus eun tad qen dinatur ?



Sifroi, beo eo, dre c'hraç Doue ?
 Setu e vagerez aze ;
 Incontinent pa zistroas,
 En e gichen en er c'havas,
 Hag eun doruat qeler gantâ,

Da rei d'e vam evit leins.



Ordren a ras d'e vevellou
 Mont d'ar gar da vit abijou,
 Hag ar c'haros eqipet mat.
 Evit donet prest d'o e'herc'hat,



Bevet o devez assambles
 Ur bloas gant cals a zantelez;
 Genoveta a decedas,
 Ar prinç hag e vab a chomas,



Ma ejont o daou assambles
 Da dremen ar rest o buez
 Er plaç ma voa Genovefa,
 D'ober pinijen ar vrassa.



Genovefa, ni o supli
 Da gaouet sonch ac'hanomp-ni;
 Troet divarnomp an teir goalen?
 Brezel, qernez hag ar vossen.

AMEN.

E MONTROULEZ, e ty LÉDAN,